

D'an 5 a viz Here

- War-dro 520, ganedigezh en neñvoù sant Apolliner, eskob Valensia, diskibl sant Mamers, breur sant Avit eskob Vienna, a dalas ouzh ar Vurgonded ariat hag a adsavas an Iliz eno.
- Er VIvet kantved, sant Plasid (Lt. Placidius), manac'h, diskibl sant Benead. Ganet e Roma, e oa yaouank flamm c'hoazh pa voe fiziet e sant Benead a-gevret gant sant Maour e Subiaco. Da c'houde ez eas Plasid ha Maour gant sant Benead da vMonte-Casino. Hervez lod e vije bet lazhet Plasid gant preizhataerion e Messina.
- E 1399 e Nuremberg e Bayern, ar gwenvidig Remont Capua, beleg, Mestr hollet Urzh ar Vreudeur Brezegenerion, kuzulier arboellek santez Katell a Sienna ma skrivas he buhez.
- E 1938, e Krakovia e Polonia, santez Faostina (Helena Kowalska), gwerc'hez. Ezel eus Kongregadur Leanezed ar Werc'hez Vari Gendruezus, abostolourez an Drugarez, e voe santelezed er bloaz 2000 gant Yann-Baol II a ensavas ivez Sul an Drugarez diwar ar c'hemennoù resevet ganti. Dre he hanterouriezh e vrudas an Aotrou Jezuz kemenn meur Trugarez Doue hag e tiskouezas ur skouer a beurvadelezh kristen diazezet war ar fiziañs e Doue hag an drugarez evit an nesañ.
- E 1191, sant Morvan pe Maoris Duod, abad sisterkian Langoned, ganet e Kroazañveg en eskobiezh Gwened met nepell diouzh Loudieg. E-pad tost da dregont vloaz, e talc'has ar garg a abad e Langoned, a-raok mont, e 1177, gant daouzek keneil, da ziazezañ ur manati nevez war-ribl aber an Ele hiziv al "Laita", e koadeg Karnoed e kreizteiz da Gemperle, war un dachenn profet d'ar venec'h gant an dug Konan IV.
- E 732, sant Badelleg (Iw. Baithelleach), eskob abad en Iwerzhon.
- Santez Sinech, gwerc'hez en Iwerzhon.

D'ar 6 a viz Here

- E 303, merzherenti, santez Feiz (Lt Fides; Sp. Fe; Gl. Foy), gwerc'hez merzherez en Aginnon hiziv Agen e Bro-C'Hall. Ganet en un tiegezh gallian-roman pinvidik e voe heskinet en abeg d'he feiz dindan an impalaer Maximianus; dêvet war ur gwele arem e voe dibennet. Kehelet-kenañ en abati Conques er Rourgues lec'h ma oa bet kaset e relegoù e voe brudet a-drugarez da birc'hirinded Kompostela hag e voe skignet he deoliezh e Bro-Spagn dindan anv Santa-Fe.
- War-dro 740, distro da Zoue, sant Pardulf (Gl. saint Pardoux), diazezeour abati Guéret e Marzoù Okitania lec'h ma voe galvet gant Lantarius, kont Augustoritum hiziv Lemojez.
- E 1101, ganedigezh en neñvoù sant Bruno, beleg, diazezeour ar Chartrouzi Meur. Er penn-kentañ e voe chaloni e Kolun e Bro-Alamagn, e gêr c'henidik, ha da c'houde e kelennas e Reims, en unan eus skolioù brudetañ e amzer. War-dro e hanter-kant vloaz e kuitas ar bed gant c'hwec'h keneil evit en em staliañ e menezioù ar Chartrouzi bras, e-lec'h ma aozas ur stumm nevez a vuhez penitiour, a voe penn-kentañ urzh ar Chartrouzed. Galvet da Roma gant Urvan II, ez eas da c'houde da sevel ur gumuniezh all e Kalabria lec'h ma taskoras e ene d'an Arloz.
- E Breizh, er VIIvet kantved, distro da Zoue sant Ivi, diagon hag abad, Iwerzhonad, mab Bronon hag Egid, manac'h e Lindisfarn, diskibl sant Kutberzh, penitiour e-kichen Kemper, bremañ parrez Sant-Ivi e Bro-Gernev.
- D'an hevelep deiz sant Ivi, manac'h breizhat, marvet e Breizh-Veur.
- Er Vvet kantved, merzherenti santez Piala (Iw. Ciara), gwerc'hez, Iwerzhonadez, lakaet d'ar marv e Kernev-Veur a-gevret gant sant Gwinier, he breur.
- Merzhrenti santez Feiz (Kn. Faith), gwerc'hez ha merzherez e Kernev-Veur.
- Er Vvet-VIvet kantved, santez Lalluw, gwerc'hez e Maenhuniad e Kernev-Veur.

D'ar 7 a viz Here

- Gouel Itron Varia ar Rozera. P'edo an Durked o c'hourdrouz ar gristeniezh e c'houlennas ar pab sant Pius V e vefe aspedet skoazell ar Werc'hez Vari ha pedet ar Rozera e pep lec'h. Goude trec'h Lepanto d'ar 7 a viz Here 1571, e tiazezas ar pab Gouel Itron-Varia an Trec'h, a zeuas da vezañ, daou vloaz goude, Gouel Rozera ar Werc'hez Santel, hag e 1960 Gouel Itron Varia ar Rozera.
- Er Iañ kantved, santez Justina, gwerc'hez ha merzherezh e Padova, badezet gant un diskibl eus sant Pêr.
- Er war-dro 300, e Rosafa en Euphratesia e Siria, merzherenti ar sent Serj ha Bacchus, ofiserion e lu an Impalaer. Ofiser roman uhel e oa Serj, o c'hourc'hemenn gant e geneil Bacchus ur bagad eus an dibab savet gant Barbared hag anvet Schola Gentilium. Diskuliet evel kristenion e c'hourbannjont o feiz gant kalonegezh: Bacchus a varvas diwar ar skourjez ; Serj goude bezañ deuet dibistik eus boureviadurioù liesseurt a voe dibennet. O bez a zeuas da vezañ ul lec'h pirc'hirinañ a-bouez bras. E Breizh e voe ur manati dindan o faeroniezh e Leskoed en eskobiezh Gwened.
- E 336, sant Mark, pab e-kerzh un nebeut mizioù hepken. Kenlabourat a reas gant an impalaer Kustentin da frammañ an Iliz o tennañ e vad eus ar peoc'h war-lerc'h mare an heskinadurioù. Sevel a reas ur brientiliz e-kreiz bered Balbin, war ar straed Ardeatin, lec'h ma voe sebeliet.
- E Breizh, sant Kido, penitiour, enoret er Vro-Vigoudenn.
- Er Vvet kantved, e Merthyr-Cynog war enez Vreizh (Kembre), merzherenti sant Keneg (Kb. Cynog), mab Brec'han.
- War enez Vreizh (Kembre), er VIvet kantved, sant Kongar a Llangefni, manac'h beleg. Mab ar roue Gerren Llyngesog eus Devnon (Domnonea), ez eas gant e niz sant Kebi da visioniñ da gentañ e Edeligion e gevred Kembre ha goude, marteze o tremen dre dTrefilan e Ceredigion, en Iwerzhon en Árainn Mhór (Inis Mór). Lezet en deus e anv da Ynys Gyngar nepell diouzh Cricieth. War enezenn Ynys Mon e tiazebjont un abati bras e Caer-Gybi (Holyhead). Da c'houde e savas sant Kongar iliz Llangefni lec'h ma varvas moarvat.
- Sant Kelleg (Iw. Ceallach), diagon e Gleann Dá Loch («Glenn an Div Loc'h»).
- E 1660, ar pac'hiad Pêr ar Gouvello a gKerioled, beleg. Denjentil ganet e maner Kerloeiz etre Santez-Anna-Gwened ha Pleuwigner, kanttroet goude ur vuhez diroll, e voe unan eus tudennoù kevrinel pouezusañ ar XVII vet kantved e Breizh. Bezet eo e brientiliz Santez-Anna-Gwened e-tal hini Iwan Nikolazig.

D'an 8 a viz Here

- War-dro 302, e Antiokeia, merzherenti santez Pelajia, gwerc'hez. Bet meulet gant sant Yann Grizostomos, ne oa nemet pemzek vloaz pa varvas.
- Er IVre kantved, santez Tais, penitiourez en Egipt. Hag hi ur serc'h klask warni met gwalleürus e kejas gant sant Pafnus a gomzas outi eus finvezhioù diwezhañ ar vuhez. Gounezet d'ar feiz en em lakaas e skol ar sant hag e teuas da vezañ leanez.
- Er Vvet kantved, santez Porker hag he c'hoarezed Sz Pallad, Magneñz ha Kamilha. Gant ur c'hoar all ha kristenion all e tegasjont korf sant Garmon eus Ravenna da Autesiodurum (hiziv Auxerre). Hervez an hengoun e voe merzheriet Porker evit mirout he gwerc'hted.
- War-dro 633, sant Edwin, tiern Norzumbria. E 625 e timezas en eil eured gant santez Æthelburg eus Kent hag e teuas da vezañ kristen e 627. Lazhet e voe en emgann Hatfield Chas e 633 ha sellet eo bet evel merzher. O merc'h santez Eanflæd zo bet abadez Whitby.
- E Breizh, e 606, sant Suliav (Sulian pe Sulieg Lt. Suliavus, Gg. Suliac), abad. Mab Broc'hmael, roue e Bro-Gembre, ez eas da vanati Meifod dindan sant Gwivarc'h. Da gentañ penitiour en enez Lanndysilio ha war-lerc'h abad Meifod eo deuet da Vreizh-Vihan lec'h ma savas e vanati war c'h-lann ar Renk hiziv Sant-Suliav, e Paou-Aled, eskopti Sant-Maloù.
- E Breizh, er VIIvet kantved, sant Restold, eskob Dol.
- E Breizh, sant Skofili, abad, kehelet e Sant-Ke-Porzh-Olued.

- E Breizh-Veur, er VIvet kantved, santez Kein, gwerc'hez, merc'h Brec'han, penitiourez e Keynsham (Glad-an-Hañv) ha da-c'houde e Kernev-Veur. Marvet eo en Aber Gefenni ma voe beziet gant sant Kado.
- Er VIvet kantved, sant Tebia (Kb. Tybie), mab Brec'han en deus lezet e anv da barrez Landebiaev.
- Er VIvet kantved, ar sent Tudouestl, Kenheizan, Luan, Ilud pe Ilid (Kb. Tudwystl, Cynheiddan, Luan, Ilud), mibion Brec'han.
- E hanternoz Enez Vreizh (Bro-Skos diwezhatoc'h), er IVre kantved, santez Tredwall (Triduana; Trollhaena, Trallen, Gl. Triduaine), gwerc'hez. Skoazellet he dije sant Riokad (pe Rieul) e-pad e abostolerezh eno. Kehelet e veze arc'h he relegoù e Restarig e-kichen Edinbourg betek ma voe distrujet da-geñver an Adreizhadur.
- En Iwerzhon, sant Maelgredan (Iw. Maolcriothán), manac'h.
- En Iwerzhon, e 1040, sant Corcan, manac'h.

D'an 9 a viz Here

- War-dro 258, ganedigezh en neñvoù sant Denez ar C'hevrenour, eskob kentañ Lutesia, hiziv Pariz, abostolour Gallia. Kaset e oa bet da C'halia gant Iliz Roma a-gevret gant c'hwec'h keneil war-dro 250. Merzheriet eo bet da vare heskinadeg Decius pe Valerianus war-un-dro gant ar beleg sant Rustik hag an diagon sant Eleuter. Santez Jenovefa a lakaas da sevel war o bez ur brientiliz kaer-meurbet a zeuas da vezañ bered-veur rouaned Bro-C'Hall. E Breizh e vez pedet evit an Anaon hag e vez profet dezhañ gwinizh du.
- Er Vvet kantved, sant Savin, penitiour. Goude tri bloaz en abati Ligije en em dennas er Bigor war zinaou ar Pireneoù lec'h ma tremenas trizek bloaz en digenvez.
- E 680, sant Ghislain (Lt. Gislenus), abad e-kichen Moñs, abostolour Hannonia (Gl. Hainaut).
- E 1601 e Valensia e Bro-Spagn, sant Loeiz Bertran, beleg dominigat. Abostolour ha difennour pobloù Amerika ar C'Hreisteiz.
- E 1609, e Roma, sant Yann Leonardi, beleg. Da gentañ e strollas e Lucca e Toscana, ur gumuniezh gouestlet da gatekizañ ar yaouankiz ha da c'houde e tiazegas e Roma ur skolaj a zeuas da vezañ diwezhatoc'h ar C'hloerdi evit Skignidigezh ar Feiz. Mervel a reas o prederiañ ar vosennidi.
- E 1890 e Edgbaston e Bro-Saoz, sant John Henry Newman, beleg, kardinal ha doueonour. Ganet e 1801 e reas e studioù e Oxford hag e teuas da vezañ beleg anglikan. Goude bezañ studiet Tadoù an Iliz e tivizas avat dont da vezañ katolik, pezh a zanevellas en e levr Apologia Pro Vita Sua. Graet kardinal gant ar pab Leon XIII e 1879. Dre e skridoù, en o zouez Yezhadur an asant, en deus bet kalz levezon war ar doueoniezh hag ar brederouriezh.
- Ar pac'hiad Pius XII, pab (an 260vet hini) etre 1939 betek e varv e 1958. Ganet eo Eugenio Pacelli e Roma d'an 2 eil a viz Meurzh 1876. Diuzet e voe da bab d'an 2 eil a viz Meurzh 1939 hag e voe merket bloavezhioù kentañ e vabelezh gant an Eil Brezel Bed. D'ar 1añ a viz Du 1950 e embannas bonreizh an Dougidigezh. Embannet en deus meur a lizhiri-meur en o zouez Mystici corporis Christi o kinnig an Iliz evel Korf kevrinel ar C'Hrist. Disklêriet eo bet pac'hiad gant ar pab Benead XVI d'an 19 a viz Kerzu 2009.

D'an 10 a viz Here

- En Ieil kantved, distro da Zoue sant Pinitus, eskob Knosos war enezenn gKretos. Brudet e voe evel servijer bras komz Doue.
- En IIIde kantved, e Kolun e Germania, merzherenti sant Gereon hag e geneiled, ar sent Kasius ha Florentinus,.
- En IIIde kantved, ar sent Viktor ha Mallosus, merzherion eus lu an impalaer e Xanten war ribl ar Roen.
- E 644, sant Paolin Evrog, eskob Evrog ha Rochester. Hag eñ manac'h beneadat e voe kaset da Vro-Saoz gant ar pab sant Gregor Veur. Avielañ a reas Bro-gKent hag Ombria an hanternoz. Degas a

reas d'ar feiz ar roue Edwin. Diazezañ a reas eskobiezh Evrog ha Rochester. Evrog a oa bet abretoc'h sez un eskopti brezhon, bet dalc'het gant s. Samzun a-raok aloubidigezh ar Saozon.

- War-dro 665, santez Teodekild (Gl. Telchide), abadez gentañ Jouarre. Merc'h Belfrid pe Betton hag Aye, c'hoar Agilberzh, eskob Pariz ha niz Mode, eil pried sant Autharius ha mamm-gaer sant Adon, diazeze abati daouel Jouarre diouzh giz sant Koulman. Bez' e voe hi e penn an div gumuniezh. Diwar c'houlen ar rouanez santez Bathilda e kasas manac'hezed da adsevel abati Chelles hag e tiazezas abati Itron-Varia Soissons. He arched maen a vez miret e kev-iliz Jouarre.

- En Aremorika, er Iañ kantved, sant Klaer, kentañ eskob Naoned bet kaset gant sant Lin, warlerc'hier sant Pêr, da gas ar C'Helou-Mat «en tu-all d'ar menezioù». Marvet eo e Regini e Bro-Gwened.

- Er Vvet kantved, sant Padrigian, eskob e Breizh-Veur, penitiour en enez Vanav.

- En Iwerzhon sant Fionntan, abad Longphort.

- En Iwerzhon, santez Siollan, maouez santel e bro gCorcaigh.

- Er VIIvet kantved, ar sent Lul ha Lulian, Iwerzhoniz, pirc'hirined, merzherion e-kichen Théroutanne e Bro-C'Hall.

- Er VIvet kantved, sant Gwendelin, penitiour e Trier.

D'an 11 a viz Here

- Er bloavezh 80, sant Fulub, diagon, "Avielour Palestina". Anvet "avielour" e levr Oberoù an Ebestel (kv. Ob 21,8-9), e oa unan eus ar Seizh bet dibabet gant an Ebestel evit o skoazellañ en o gwaziadezh. Gounit a reas d'ar C'hrist an eunuk, maodiern Kandake rouanez Etiopia (kv. Ob 8,26-39). Avielañ a reas ar Samaria betek Kaesarea lec'h m'emañ e vez.

- War-dro 304, e Anazarb e Silisia, merzherenti ar sent Tharacus, Probus hag Andronicus. Profañ a rejont o buhez o c'hourbann ar feiz hag int boureviet kriz da vare heskinadeg Diocletianus.

- E 357, distro da Zoue sant Sarmat, manac'h ha merzher e bro-dTebaid, diskibl sant Anton Veur, muntret gant Bedouined.

- E 553, sant Firmin, eskob Uzes en Okitania, diskibl ha buhez-savour sant Kesaer Arles, eont sant Ferreol e warlerc'hier.

- E 664 pe 678, ganedigezh en neñvoù santez Ethelburga, abadez Barking e Bro-Saoz. Merc'h Anna, roue Angled ar Reter, c'hoar santez Etheldred (Ediltrud), santez Sexburga, santez Wilburga, sant Erconwald, eskob London hag hanter-c'hoar santez Sebrida. Stummet e voe gant santez Hildelit.

- E 680, sant Aelberzh, abad Caerwynt ha Pariz war-lerc'h.

- War-dro 383, sant Meurzh pe Marzh (Lt. Marcius, Gl. Mars), eskob Naoned.

- E Breizh, er VIvet kantved, sant Ternev pe Terneg (Gg. Arnec, Ternoc), eskob-abad, Iwerzhonad, diskibl sant Juzeg eskob-abad Clochar (Iwerzhon), penitiour e Landerne.

- Er VIvet kantved, sant Gwinian (Gg. Guinien), penitiour, eskob e Leon, keneil da sant Ternev.

- Er VIvet kantved, sant Fortchern, eil eskob Baile Atah Truim (Trim) en Iwerzhon, war-lerc'h sant Loman e vadezas, mab ar roue Laoghaire.

- Er VIvet kantved, sant Cainneach (Lt. Canicius, Sz. ha Gl. Canice), abad Cill Cainnigh (Kenneth) hag Achadh Bo (Aghaboe) e hanternoz Enez Vreizh (Bro-Skos). Mab ur barzh e Bro-Laois en Iwerzhon, bet diskibl sant Finnian e Clúain Ioráird en Iwerzhon ha bet diskibl sant Kadog e Nantcarfan (Kembre), lec'h ma voe desavet diwezhatoc'h s. Maloù gant s. Brendan ; ez eas da hanternoz Enez Vreizh hag e kenlabouras gant sant Koulmkell. Emañ e-touez daouzek abostol Iwerzhon.

- Er VIvet kantved, sant Cainneach, abad Cill Cainnigh hag Achadh Bo.

